

TI-KANIRI BREIZ

123

Ni 'zo deut da gana hirie
Vel en amzer goz,
Pa oa 'uz d'ar vro dorn Doue
O rei e vennoz,
En amzer ma oa Breiz-Izel
Eur vro gaer hag eur vro santel...
Deuit aleis,
'Barz en Ti-Kaniri Breiz !

Ni hon deus savet an ti-man
E-kreis an dachenn,
N'eus moger 'bet en-dro d'ezan,
Hag evit toen
Na n'eus nemet bols an nenvou
Pe ar gouez, pe ar goabrennou.
Deuit aleis,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Ni fell d'eomp e vo adsavet
An holl bardoniou,
Ha 'vel gwechall e vo kanet
Gwerziou ha soniou,
Argaset ar skoueriou hudur,
Kemeret ar wir blijadur.
Deuit aleis,
'Barz en Ti-Kaniri Breiz !

Tostaït 'ta bras ha bihan,
Pinvidik ha paour,
Ne ganomp ket evit arc'hant,
Kennebeut 'vit aour...
Ni a ro hon foan, hon amzer,
'Vit Breiz-Izel hag he braster...
Deuit aleis,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Aman 'ta e klevfet meuli
'Pez a dle sevel
An eneou mad en dudi
'Vel war ziou askell ;
Ar fallagriez diskuilhet
A vo taolet d'an drouk-spered
Deuit aleis,
'Barz en Ti-Kaniri Breiz !

Ar furnez hag ar wirionez,
Argaset dre-holl,
Siouaz, en hon amzer nevez,
Gant an dud diroll,
Ganeomp a vo skoaziet bepred
A-eneb da vistri ar Bed.
Deuit aleis,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Evit difen hon c'hoz herez,
Dreist-holl feis ha yez,
Ni ya en Breiz dre bep parrez,
Hep doujans na mez,
'Vel ar beorien ni oar bale
Ha kousket war blouz 'vit gwele,
Deuit aleis,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Mar pe bet eun tamm plijadur,
P'arrufet er gêr,
D'ho re goz ha d'ho krouadur,
Kanit 'ta emberr
Eur werz dudius pe eur zon,
Evit ma sailho o c'halon
En o c'hreis,
Dre garantez evit Breiz !

Erwan BERTHOU.

Hob y deri dando

Me am boa eur vestrez saoez,
Hob y deri dando...
Pen melen, teod hir ha luches,
Yannig a gan ato !
Met pa gomzen a zimezi,
Yannig, Yann,
O nann, ne rin ket ar fazi,
Yann gamm, paotr e vamm,
A glask bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm,
Hen dije tapet eur pezh lamm !

Henvel 'oa he mouez o kana,
Hob y deri dando,
Ouz eur goz vioc'h o vlêja,
Yannig a gan ato !
Pe ouz eur c'hoz ki oc'h harzal,
Yannig, Yann,
Aet e damm askorn gant eun all ;
Yann gamm, paotr e vamm
A glask bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm
Hen dije tapet eur pezh lamm !

Dreist ar mor e nij va c'halon,
Hob y deri dando,
Tresek va mestrez ken mignon,
Yannig a gan ato !
Tresek an ael a garante,
Yannig, Yann,
A zo 'barz va zonzou noz-de,
Yann gamm, paotr e vamm
A glask bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm
Hen dije tapet eur pezh lamm !

*Troet diwar ar c'hemraeg
gant Fanch GOURVIL.*

Ar Boutaour Koat

Selaouit holl 'ta selaouet,
Tran lar dirêno
Eur zon a zo nevez savet,
Tran lar dira lanla,
Tran lar dirêno.

Eur zon a zo nevez savet,
D'eur boutaouer koat eo bet grêt.

Savet eo d'eur boutaouer koat
A zo o chom e-kreis ar c'hoat.

E lochen blouz a zo bravet
Gant gwiad kewnid ha moged.

— Penaos kas d'ezan e veren,
Pa n'ouzon hent na gwenojen ?

— Pignit aze war ar c'hleuz all,
Ha c'houi 'glevo trous e vouc'hal.

Trous e vouc'hal hag e dalar
O vont en-dro primm ha dispar...

Ar boutaouer a zo laouen
Hag a c'houitell a-bouez e benn.

— Pretra 'zigases da zibri ?
Digor ar baner ma welin.

— N'am eus gallet digas fenez
Nemet krampouez ha bara gros.

Pinvikoc'h 'vezfom moarvad,
P'am mo gwerzet va boutou koat.

Ha disul vintin a mefomp
Kig sall ha gwin, pezh a garfomp.

PELL A VREIZ-IZEL

I

Pell a Vreiz-Izel, va bro garet,
Pell diouz he nenv,
Va c'halon baour a zo glac'haret,
Ha trist ive va ene.
Kaer a meus bale ha redek bro,
Dre an holl-ved,
N'hellan kavet levezeg em zro
Pell a Vreiz-Izel garet.

Diskan

N'euz fors pelec'h e tremenan
Me zo divroet,
O va doue, penaoz e vevan,
Pell a Vreiz-Izel garet !...

II

Bet 'oun en Pariz hag en Rouan,
Ha pelloc'h c'hoaz,
Gwelet 'meus ar c'hêriou ar c'haeran
Hag a zo bet biskoaz.
Er Frans, er Spagn, en Bro ar Zaozon,
'Meus baleet,
Hag an hirnez a vroud va c'halon,
Pell a Vreiz-Izel garet.

III

En Breiz-Izel e meus va breudeur,
Ouz va gortoz
Va mamm ha va douz en disesper
O ouela d'in deiz ha noz.
En Breiz eman an douar santel,
Va zad kousket,
Ha me ive, fell ket d'in mervel
Pell a Vreiz-Izel garet.

*Henveleket ouz an amerikan
gant E. KOETSKAU.*

AR PILHAOUER

Va zad hen deuz va dimezet,
D'eur c'hoz flerius pilhaouer,
En Lokewret ez eo ganet,
En komanant Toul al Laer.

Diskan

Fœï, fœï, fœï, va zammig aotrou,
Gant e stoup hag e bilhou !

Tri devez goude va eured
En em gav foar Landerne,
Hag va lapous, priñm dihunet,
A zailh e-maes e wele.

Drailha 'ra eun hanter pater,
Tana 'ra e gorn butun,
Tapout a ra e grog pouezer
Evit mont war hent Sizun.

Pa oa hanter-nos sonet
En ilis vras ar Fouilhe,
Me oa intañvez glac'haret,
Va-unan 'barz em gwele.

Kavet hen doa kamaraded,
En eur vont da bilhaoua,
E holl arc'hant hen doa fouetet
Ha tamm pilhou bet n'hen doa...

Pa 'z a Yannig d'ar pardonieu,
Atao e vez mezo dall ;
Prest e oa da goll e vragou
En Lokewred an deiz all.

Mont a ra d'ar vilin baper
Gant eur zac'hadig pilhou,
Kals buanoc'h eged eul laer
Rag preset eo an delliou.

Pa zeuio ar c'hiz er vro-man
Da derri an dimeziou,
Me a yelo en eur gana
Pell diouz pautred ar pilhou.

Pa zeuio karrig an Ankou
D'ober e dro er vro-man
Me a gerzo war e roudou
Hag en pedo d'her samma.

P'hen devo an Ankou boutet
En toull ar c'hoz pilhaouer,
Me a yelo en eur gana
Da gomanant Toul al Laer :

Maro eo va zammig aotrou
War e stoup hag e bilhou !



Komzet 'vo d'an aotrou person
Deus ar flerius pilhaouer
'Vit ma kano al Liberon
Hag ouspenn ar Lib-e-rer.



KOUSK BREIZ-IZEL

An heol a zo kuzet, sethu achu an de,
Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave.

Diskan :

Kousk, Kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an nos o tont war an douar,

Kousk,

Breiz-Izel, bro ken mad,
Trouz ar mor braz a zav d'az luskellat.

C'houez vad an ed en bleun, hag al lann alaouret,
War ar maeziou, gant ar gliz nos a red.

Ar vaeserien a gan o tastum o loened,
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traouiennou didrouz, me glev kan an eostig,
Telenner nos, sonit flour ha dousik.

An neb a c'houez bemdez a c'hounid e repos,
D'an dud vad, Doue hen deus graet an nos.

Uz da Vreiz o skeudi, an nenv steredennet
A lavar 'zo eun Doue ouz hon c'haret.

Breiz-Izel, douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar.

Abad MARECHAL

AR C'HLOAREG NEC'HET

I

Kals amzer a meus kollet,
Tra la la la la ladira loléno
Kals amzer a meus kollet,
Ha studia n'a meus ket graet
Beaucoup de temps j'ai perdu,
Tra la la la.....
Beaucoup de temps j'ai perdu,
Etudier je n'ai pas pu.

Multum temporis perdidit

Tra la la.....

*Multum temporis perdidit,
Et studere non potui.*

II

Abalamour d'eun dimezel
Tra la la.....
Abalamour d'eun dimezel,
A greiz va c'halon a garien.
Pour une jeune fille que j'aimais,
Que de tout mon cœur j'adorais.

*Propter quandam filiolum
Quam tôte corde amabam.*

III

'Barz ar Ru Neve e chomme
Hag alies d'in e lare :
Dans la Rue Neuve ell' demeurait
Et souvent elle me disait
*In Via Nova manebat,
Sepeque mihi dicebat :*



O c'houl' bara digant tata
Ha boïk boïk boïk digant mama ?..

Demander du pain à leur père
Ainsi que du lait à leur mère ?..

*Panem a patre petentes
Lac a matre postulantes ?..*



IV

Pretra 'res barz ar skolachou,
Mar tleomp beza priedou ?
Dans le collège que faites-vous,
Si nous devons être époux ?
*Quid facis in collegio
Si mihi fueris sponso ?*

V

'Barz ar gêr-man 'zo soudarded,
Kemer't unan ha va lezet.
Dans cette ville y a des soldats,
Prenez-en un et laissez-moi...
*Sunt milites in hac urbe,
Cape unan dimitte me.*

VI

Deus ho soudarded n'houlan ket,
Eur c'hloareg 'renkin da gavet.
De vos soldats je ne veux pas,
Un doux clerc me possédera.
*De tuo milite nolo,
Sed clericum possidebo.*

VII

Pretra 'laro d'eomp-ni hon tud
Pa glevfont bugale vunud,
Mais que diront nos chers parents,
Quand ils entendront nos enfants,
*Quid dicent quoque parentes
Quando audient infantes,*

VIII

PAOTRED ROSKO

I

N'eus par en Breiz-Izel da baotred Rosko,
Brudet 'int 'vit o nerz dre-holl 'barz ar vro,
Diwallit da goueza dindan o fao,
Ro, sko, sko mibin, sko kalet, sko ato !
Ouspen labourerien dispar int ive,
Da c'houlou-deiz 'maint er maes o gwele,...
Gwelit-o bemdez en aochou tro-war-dro,
Kerkent ma vo tre, betek ma vo lano,
O peillat bezin war ar reier garo,
Ro, sko, sko mibin, sko kalet, sko ato !


II

Kals ijin o deus ive paotred Rosko,
Deus Bro-C'hall a-bez o deus graet an dro,
'Vit gwerza o zrevad dre ar marc'hajou,
Ro, sko, sko mibin, sko kalet, sko ato !
Dre Baris, dre Vro-Zaos o deus tremenet,
Mont a raint hep dale betek pen ar Bed,...
Ar Roskoad, gant e vouez skiltr a youc'ho :
« Patatez, ougnon, brikoli, articho ! »
Dibabit, kemerit, an neb a garo... »
Ro, sko, sko mibin, sko kalet, sko ato !

III

N'eus ket lorc'husoc'h eged paotred Rosko.
Gwalen war o bis, c'houez vad war o bleo,
Voulouzen ledan en-dro d'o zog kolo...
Ro, sko, sko mibin, sko kalet, sko ato !
Gant o dousig, pa 'z eont d'ar pardoniou,
'Kargont he godel a bep sort madigou,
Anaout a reont mad kement dans a zo,
Ar ganaouen ive, 'blij eston d'ezo,
Evelse, ar merc'hed 'zo pitilh ganto,
Ro, sko, sko mibin, sko kalet, sko ato !

E. d'HERBAIS.



Mouez ar C'hleier

I

Bim, baon, me zo strobinneller,
Me oar petra 'gan ar c'hleier.
Selaouit holl o mouez santel,
Ha sentit mad ouz o c'hentel.

II

Bim, baon, baon ! kloc'h an ofern bred,
Laret a ra : « Hastet, hastet ! »
Kals ne zigouezont en iliz,
Nemet en hanter an ofis ..

III

Darn ne reont nemet roc'hal,
Ha lod all, resped d'eoc'h, strakal,
Tompilhat gant o diou froen,
Pe riboulat o c'horzailhen.

IV

Ar baotred lemm, dindann o zao,
A lugern ouz ar merc'hed brao ;
Gant eur zell flemmus, ar merc'hed,
A lavar d'ezo : « Kendalc'het ! »

V

Yann Bitoch a glask 'n e spered
Penaos yenna e vignoned,
Lakat en e yalc'h eur bern kresk,
Dre ar burzud eus ar pemp pesk.

VI

Ar person koz 'zo barodus,
E brezegen 'zo moreodus,
Hep mar ar zouben vo yenet,
Hag ar patatez kaledet.

VII

Ar c'haner koz, Luc Totoro,
A vlej vel eur c'holê taro...
Emberr e walc'ho e gorzen,
Fant a lardo c'hwek e groc'hen.

VIII

Bim, baon, kloc'h eur vadiziant,
Ar bugelig, va feiz 'zo koant,
Ha ouz e dad eo henvel tre,
Fri e baeron 'n eus koulkoude...

IX

Gan an holen kriz, va aelig,
E vo ruziet da vuzellig...
Er vuhez, enkrez ha daêlo
E kavi c'hoaz muioc'h c'hwero.

X

Bim, baon, dimezi daou baour kez,
...Poaniou, truilhou, ha dienez...
Sort da frita 'met paourentez,
Eleiz pillig ar garantez !

XI

Bah ! chaoket e vo patatez,
Laket hanter dour barz al laez :
Doue a vev al loened mud,
Truez en devo ouz an dud !

XII

Bim baon, enn eured pinvidik,
Brall d'ar c'hleier, c'houez d'ar muzig.
Diou yalc'h bouner zo 'n em baret :
Ki ha kaz a zo baz-yeoet.

Bim baon, brimbalomp a nerz brec'h,
 Marvet eo pao-krog ar c'hrug sec'h...
 Ognon, kignen, a zruilladou,
 Ken'na strinko eur mor daëlou.

Tad eun tiad bras bugale,
 A zo galvet dirak Doué,
 An holl a ouel gant gwir glac'har,
 Ar c'hi a yud warlerc'h ar c'har.

Bim baon, petra ne leront ket,
 En kement yez 'zo dre ar bed ?
 Kouls eo d'in eta troc'ha berr,
 Sard oun, vel eun teuzer kleier !

Prosper PROUX.



HIR VOUDOU

I

Perak oc'h c'houi ken kaër gwisket
 Traonien ha prad leun a vleuniou ?
 Perak e kanit, lapoused,
 Tre ma 'z oun-me o skuilh daëlou ?
 Ho kanaouennou dudius
 Va c'halon baour d'in a ranno,
 O komz eus eun amzer evrus
 Ha ne deuiio biken en-dro...

II

Da c'houlou deiz, vel d'abardaez,
 Me garie mont war ribl ar ster,
 'N eur vouskana va c'harantez,
 ' Vel an eostig, an alc'houeder...
 Dindan ar gouez, laouen bepred,
 E kutuilhen bleuniou dispar :
 Siouaz, sethu me dilezet,
 Ha rannet holl gant ar glac'har...

Troet diwar ar skoseg gant
 POTR TROURE.

AR BONOMIG

- De-bonjour d'eoc'h Janedig,
De-bonjour a laran, breman,
De-bonjour a laran...
Pelec'h 'man ar Bonomig,
Pa n'eman o tommann, breman,
Pelec'h 'man ar Bonomig,
Pa n'eman o tommann ?
- Eman du-ze el liors,
Oc'h eyesaat an ed, me gred,
Oc'h eyesaat an ed...
It d'e gaout di, Kloaregig,
Ha n'ho refuzo ket,
Ne rai ket,
It d'e gaout di, Kloaregig,
Ha n'ho refuzo ket...
- De-bonjour d'eoc'h, Bonomig.
De-bonjour a laran, breman,
De-bonjour a laran.
Konje ho merc'h Jannedig,
Ouzoc'h a c'houlennan, breman ;
Konje ho merc'h Jannedig,
Ouzoc'h e c'houlennan ...
- Evid sur va merc'h Janned
Ni zimezo ket c'hoaz, evit c'hoaz,
Ne zimezo ket c'hoaz...
Chomm a rai daou pe dri bloaz
Da roull an ebad c'hoaz, evit c'hoaz,
Chomm a rai daou pe dri bloaz,
Da roull an ebad c'hoaz.
- Keuz ho pezo, Bonomig,
Beza va refuzet, hag abred,
Beza va refuzet ;
C'houi zeui d'hi c'hinnik d'in-me,
Mes n'he c'hemerin ket, ne rin ket...
C'houi zeui d'hi c'hinnik d'in-me,
Mes n'he c'hemerin ket...
- Dalit ho sac'h, Kloaregig,
Lakit-han war ho skoaz. o ya da,
Lakit-han war ho skoaz !
Koulz eo d'eoc'h e kaout breman,
Evel e gaout da vloa, o ya da,
Kouls eo d'eoc'h e gaout breman,
Evel e gaout da vloa !...
Neuze ya ar c'hloaregig
Da gavet Janneton, oho ho !
Da gavet Janneton...
- Eur pok d'eoc'h-c'houi, va dousig,
Ouzoc'h a c'houlennan, breman,
Eur pok d'eoc'h-c'houi, va dousig,
Ouzoc'h e c'houlennan...
- Elec'h eur pok, Kloaregig,
C'houi pezo daou ha tri, o ya c'houi
C'houi pezo daou ha tri,
Ha malloz d'ar gwall deodou
'Zo kaoz d'ho disparti, o ya ni,
Ha malloz d'ar gwall deodou
'Zo kaos d'hon disparti !...
- A-benn eun nebeut goude
Janned zo chomet klanv, o ya klanv !
Mar kommans ar Bonomig
Dont d'en em chagrinan, han han han !
Mar kommans ar Bonomig
Dont d'en em chagrinan...
- Ha sethu ar Bonomig
O vont da foueta bro, oho ho !
O vont da foueta bro,
Evit klask ar c'hloaregig,
Da gemer Janneton, ho ho ho !...
Evit klask ar c'hloaregig
Da gemer Janneton.
- De-bonjour d'eoc'h, Kloaregig,
De-bonjour a laran, breman,
De bonjour a laran.
Abaoue 'z oc'h bet du-man,
Janned 'zo chomet klanv, o ya klanv
Abaoue 'z oc'h bet du-man
Janned 'zo chommet klanv !
- Laret 'moa d'eoc'h, Bonomig,
Ho pije va c'hasket, hag abred,
Ho pije va c'hasket,
'Teujec'h d'hi c'hinnik d'in-me,
Mes n'he c'hemerin ket, ne rin ket...
'Teujec'h d'hi c'hinnik d'in-me,
Mes n'he c'hemerin ket...
- Dalit ho sac'h, Bonomig,
Lakit-han war ho skoaz, ho ya-da,
Lakit-han war ho skoaz...
Koulz eo d'eoc'h e gaout breman.
Evel e gaout da vloa, o ya-da,
Kouls eo d'eoc'h e gaout breman,
Evel e gaout da vloa...

DOUSIG KOANT

I

Luguerni 'ra 'r stered,
Dousig koant, Dousig koant !
Al loar 'zo dispaket,
Dousig koant !
Daëlou perlez 'zo skuilhet
War ar bokedou kousket,
Me, siouaz 'zo ankeniet,
Dousig koant, Dousig koant !

II

' N ezen noz a dremen,
Dousig koant, Dousig koant !
Sevel 'ra ar c'hlizen,
Dousig koant !
Taol warnon, va c'harantez,
Eur zellig a drugarez ;
Me da gar gant follentez,
Dousig koant, Dousig koant !

III

Selaou 'ta va fedenn,
Dousig koant, Dousig koant !
Ma tec'ho va anken,
Dousig koant !
Gra ma vo gwir va hunvre,
Ha ro ar peoc'h d'am ene,
Me vo evurus neuze,
Dousig koant, Dousig koant !

Troet diwar ar c'hemraeg gant
E. d'HERBAIS.

SON AR BLOAZ NEVEZ

Poent eo d'it, bloaz koz milliget,
Tra la la la la la la la...
Kuitaat ar bed ganez gwasket,
Tra la la la la la la la...
Warc'hoaz e teui ar bloaz nevez ;
Tra la la la la la la la...
Ne vo gantan 'met madelez
Tra la la la la la la la...

Rei a c'hell d'eomp plijaduriou,
Hag ivez kals a drubuilhou ;
Goulenomp gantan eurusted
Ha beza bepred unanet.

War adrenv an dristidigez,
D'eomp ar joa hag al levez,ez
Stagomp kelenn ouz hon treustou
Hag evomp chist ken na foeltro !...

E. d'HERBAIS.

En Landevennek (1)
'Zo peder vaouez evit eur gwenneg ;
An hini 'chom da varc'hata,
Hen deus evit netra ;
Hag an hini a erru d'ar yaou,
A gav leis ar c'hraou...

(1) Lavaret a ren ivez clech Landevennek. E. Lomikel an Trezennek... Er Voguerieg... Barz en Drenneg,
hag all...

Kan Gourennerien Breiz

(War eun ton kemraeg)

Ni 'zo paotred taer a Vreiz-Izel
A gar o mamm-vro dreist pep tra,
N'eus na mor, n'eus na tan na brezel
Hag a ve kab d'ober d'eomp krena !

Diskan

Paotred Breiz, gourennerien dispar,
Paotred Breiz, gourennerien dispar,
Paotred Breiz, n'eus 'vit o diskar !

Ar Vreiziz, a viskoaz, da viken,
A zo digabestr ha divlamm ;
N'eus breman na pagan na kristen
Hag a ve kab da rei d'eomp al lamm !

Gourennomp ha kanomp gant kalon,
Evel hon tadou koz gwechall,
Pa oa trec'h ar Vreiziz d'ar Zaozon,
Ha pa oa Breiz trec'houes Bro-C'hall !

ERWAN BERTHOU.



*C'houez an te hag ar c'hafe
A zo gant merc'hed Landerne.*

*C'houez an tin hag ar roz venn
A zo gant merc'hed Lesneven.*

*C'houez ar bezin hag ar brug
A zo gant merc'hed Terrug.*

*C'houez ar bezin hag ar mor
A zo gant merc'hed an Arvor.*

*C'houez ar baotred hag ar potans
A zo gant merc'hed Rekouvrans.*

MATILIN AN DALL

Breizis, va c'henvrois karet,
Hirio, siouas, me a zo koz
Nag a bet gwech e meus sonet
Da zansal en deiz hag an noz,
Ha mar plij gant santes Anna
E klevoc'h c'hoas var an dachen,
Son skiltruz va bombard velen
O lakat tud or Breiz da drida.

DISKAN

Me eo Matilin an dall
Ar bombarder laouen,
A laka'n dud da zanzal
Diyar va barriken :
Eun taol sut ! ha souden
Potred skanv d'an abaden
Eur bom soun, ha raktal,
Paotred o fringal ! gê.

laouank e kollis ar-gweled...
An eostik, ma lavarer mad,
A gan flouroc'h en e gaouet
Pa vez dallet e zaou lagad :
An dall a gaerik Kemperle,
E n'he lochen var ribl an dour,
Evel an eostik a zon flour
Etre an Izol hag an Elle.

Iannik-ar-Japel, em c'hichen,
A c'hoari gant he viniou.
Dreist holl pa zun bord e veren
Evit souplat e vuzellou,
Nag hen a sko, lann va c'homper,
Gant he zounerezik lirzin...
Ha d'he heul pa sko Matilin
Eo mars gwelet penaos e fringer.

Bet oun e Paris, eun devez,
O sini diraz ar Roue
Hag hen kouls ha tud e balez,
Gant ar blijadur a c'hoarze,
A c'hoarze krenv, a c'hoarze pell
Hep gallout miret da c'hoarzin,
O klevout an dall Matilin
O tistaga toniou Breiz-Izel.

Malo-Korred a Gear-Ahez,
Kenta grenadour a Vro-C'hall,
A veritas klevet ivez
Sounerez Matilin an dall ;
A dost, a bell e tiredet,
Da velet patroum ar soudard,
Ha da glevet mouez va bombard
O kana enor ar Vretoned.

Kals all a vije pinvidik
Ha ganin-me ne jom netra
Nemet isign va bombardik
Da c'hounid va zammik bara.
Met a ze pikol fors ne rann ;
Me zono keit ha ma vevin
Ha deiz, va maro ne gollin
Nemet va bombard ha va diskan.



J. QUÉRÉ.

JULIG AR VERVERO

Me 'gave d'in, gwech dimezet,

Julig ar ververo,

N'am ije graet netra ebet,

Juliver tonti, juliver tonton,

Julig ar ververo,

Daoulagad a skuil daelo...

Padal e renkan ober toud,

Aoza krampoez ha frita youd.

Ar pez a gavan gwasoc'h c'hoaz,

Eo pilat lann gant va zreid noaz...

Dimezet 'oun d'eun ever gwin

A ya d'an avarn bep mintin

Ar gwin a ev leis e weren

N'eo ket gwin ruz, met gwin melen.

D'an davarn e ya mintin mat,

D'ar gêr e teu gwall ziwezat.

Neuze 'kommans al langachou,

Ar malloziou, ar bac'hadou.

Ne glevan ken nemet — « Kerz kuit !

An ti 'zo d'in, ar maes 'zo d'it ! »

An dud yaouank, pa zimezont,

Ne ouzont ket petra 'reont.

C'houi, tud yaouank dizimez c'hoaz,

'Raok dimezi grit mat ha choaz !...

VA ZI BIHAN

I

A bep tu em eus redet
Da glask an eurusted,
D'heul va labour, da c'hounid va bara...
Mes d'ar gêr, pa zistroan,
Em c'halon e tanvan
Al levez, ar blijadur vrasa.
Pa zeu 'n avel da c'houeza,
Ar mor bras da eonenna,
Pa ziroll ar wall-amzer, er goanv,
O ! nag eo dudius
Chomm er goudor evurus,
Er gêr, en va zi karantezus...

Diskan

O, me da gar, ti va zadou,
Muioc'h eged an holl densoriou,
Karget laouenn
A sklerijenn,
Ti koz,
Te 'zo 'vel eur baradoz !

II

Ro digemer d'ar bugel
Distroet d'e gavel,
Ro d'in nerz, deus da floura va c'halon...
Me 'wel aze, damguzet,
Va c'hadorig vourret,
He divrec'h astennet war zu ennon.
An horolach o seni
A sko vel kaniri,
Hag a laka va gwad holl da virvi...
O, va zi benniget,
Da vouse'hoarrou entanet,
A laka da dridal va spered !...

Troet diwar ar c'hemraeg gant
PAOTR TREOURE.